

AR VUHEZ KRISTEN



RÉDACTION
et
ADMINISTRATION



38
Avenue de la Marne
LORIENT

Koumanantchou

An holl goumanantchou a gomans e miz Genver. — Skriva an hanoioù hag an adress fraez ha penn-da-benn ; ma n'eus bureo post ebet er gomun, lakat gant pehini e vez graet.

Koumanant ordinal : **6** l. ar bloaz.

Koumanant a enor : **10** l. ar bloaz, gam
perz e 365 OFERENN (unan bemdez) a vez
lavaret bep bloaz evit hor madoberourien.

N.-B. — Hol lennerien, m'o deus c'hoant, a c'hell dreizo o-unan rei frouez an oferennoù-se d'o zud varo.

Adkoumanantchou

An neb a vez echu e goumanant, a vez kaset d'ezan dre ar post eur « MANDAT-CARTE », evit ma c'hello koumananti a-nevez. —

Ni a gont war bolontez vat hol lennerien evit paea raktal.

An neb n'en devo ket paet *TRI MIZ GOUDE*, ne resevo mui ar gelaouenn.

TAOLIT EVEZ : lavarit atao petra 'zigasit d'eomp : EUN ADKOUMANANT pe EUR C'HOUMANANT NEVEZ ; ma tigasit asamblez adkoumanantchou ha koumanantchou nevez, *DISPARTIA MAT ANEZO*. — Evit eun adkoumanant, rei d'eomp an adress eür *EVEL MA OA WAR AN NIVERENN DIWEZA...* ha ma'z eo ret, goulenn da-c'houde chanj anezi.

Chanj adress

Evit chanj adress, digas d'eomp 4 real e timbrjou gant an adress evel ma oa war an niverenn diweza.

Liziri ha skridou

An holl liziri a dle beza kaset da :

Monsieur le Directeur de Ar Vuhez Kristen
38, Avenue de la Marné, Lorient (Morbihan).
C.-C. 209-81, Nantes.

N.-B. — Ar gelaouenn-man a zo moulet ivez e galleg ; rak-se ar re o defe c'hoant da gaout an hini c'hallek e-lec'h an hini vrezonek, n'o defe nemet skriva d'eomp, hag e vefe kaset d'ezo *La Vie Chrétienne* e-lec'h *Ar Vuhez Kristen*



Kenteliou an aviel

Divizou Jezuz gant e Ebestel

Dre ziou wech, en deus Jezuz kaset e Ebestel da brezeg : ar wech kenta, a-raok e varo, p'en doa gourc'hemennet d'ezo, evel m'hon eus gwelet, mont daou ha daou dre vro ar Galile hag ar Jude ; an eil gwech, goude e varo, a-raok distrei d'an Nenv, p'en doa lavaret d'ezo mont da brezeg an Aviel da gement pobl a zo war an douar.

Ar wech kenta, o vont dre ar Galile hag ar Jude, n'o doa ket bet da c'houzanv kalz droug na trubuilh. Met ar wech all, o vont dre ar bed a-bez, e tleent beza gwallgaset e pep doare betek beza laket d'ar maro. Setu perak e fellas d'Hor Salver rei d'ezo, pell a-raok, da anaout pegement o dije bet diwizatoc'h da c'houzanv ; evel-se, e vijent bet nebeutoc'h souezet pa vije digouezet ganto an trubuilhoù-se. Hag ouzpen, e sonj a oa deski penaos herzel neuze ha rei d'ezo hardiegezh ha nerz-kalon.

« O kas a ran, emezan d'ezo, evel d'arved e-mesk ar bleizi. Bezit eta eveziek evel naered ha didroidell evel koulmed. » Evel m'en dije lavaret : bezit dous dalc'hmat, hep morse kounnari, dirak ar re a vo kriz en ho kenver evel bleizi. Ne vern pegen taer ha fall e vezint-i, c'houi, chomit bepred kunv ha didroidell enep d'o fallagriez. Bezit fur hag eveziek evit na gouezoc'h ket en o rouejou, evel ma ra an naer hag a wel mat gant he lagad lemm kement tra a laka he buhez en danjer.

« An dud, a lavare c'hoaz Jezuz, ho kaso dirak al leziou-barn hag ho skourjezo en o sinagogou. Abalamour d'in-me, e vezoc'h kaset c'hoaz dirak ar c'houarnerien hag ar rouarded, evit rei testeni d'in dirak ar Judevien hag ar baianed. Pa zegouezo kamant-se ganeoc'h, na glaskit na penaos komz na petra lavarout ; rak n'eo ket c'houi a gomzo neuze, Spared ho Tad a gomzo dre ho kenou. »

Jezuz a lavar neuze splann d'e Ebestel perak e vezint gwallgaset evel-se, abalamour ma'z int e ziskibien d'ezan hag a vo ivez gwallgaset gant an dud fallakr betek beza staget ouz ar groaz :

« An diskibl, eme Jezuz, n'eman ket dreist e vestr, nag ar mevel dreist an aotrou. Awalc'h eo d'an diskibl beza evel e vestr ha d'ar mevel beza evel an aotrou. Mar o deus lavaret diwar-benn ar mestr e oa Beelzebub, p'etra a lavarint-i diwar-benn ar servijerien ? » Jezuz a zo bet gwallgaset gant an dud en e Basion, ha laket d'ar maro abalamour ma prezege ar wirionez, eur wirionez kalet da glevout. An Ebestel hag ar re a zo deuet war o lerc'h n'e reont nemet prezeg ar wirionez a brezege Jezuz e-unan. An dud a bep auzer a zo henvel an eil ouz egile. Kas o deus ouz ar wirionez a damall o gwall-vuhez, hag a ra d'ezo krena e-kreiz o flijaduriou gant ar spont da veza kastizet gant Doue. Ha setu perak, — her c'hompren a rit mat breman —, e vez graet brezel bepred d'ar re a brezeg d'an dud ar wirionez.

Koulskoude Jezuz a glask, diwar-neuze, rei nerz ha fizians d'e ziskibien evit an amzer-da-zont : e oa o paouez lavarout d'ezo e tigasfe d'ezo ar Spered-Santel evit o sikour da respont d'o barnerien. Lavarout a ra c'hoaz : « N'ho pezit ket aon outo... Na grenit ket dirak ar re a laz ar c'horf met n'hellont ket laza an ene; krenit kentoc'h dirak an neb a c'hell koll ar c'horf hag an ene en eur deurel anezo en ifern. »

E gwirionez, petra c'hell ober an dud fall hag ar vourrevien d'ar re a gouez etre o daouarn ? Gellout a reont ober d'o c'horfou kalz a zroug, ha memes rei d'ezo taol ar maro. Met daoust ha kement-se a zo droug e gwirionez ? Nann, rak gant an droug-se ha na bad ket pell, e c'hounezet eürusted peurbadus ar baradoz.

Ma tigorfe ar baradoz dirak hon daoulagad, ma c'hellfemp gwelout eno an Ebestel hag an holl verzerien o deus rôet o buhez evit Jezuz-Krist, ma c'hellfemp o c'hlevout, o komz d'eomp eus o levezon, na pegen bras mall hon defe da gemer perz en o eürusted dispar !

N'eus ket eta da gaout aon rak an droug na memes ar maro po c'houzanver evit an Aotrou Doue. Aon a dleer da gaout da veza taolet en ifern gant an Aotrou Doue hag a gastiz zvel-se ar re o deus hen nac'het ha dilezet gant aon rak an dud hag evit plijout d'ezo.

Mezeven, miz ar veleien nevez...

Sonj, o Beleg, eo da zever
Labourat mat park da Salver
Ha sonj ervat n'eus bet biskoaz
Gwelloc'h benveg eget ar Groaz.

B...

Stag e groc'henn ouz e gein...



Ar Pennher koz a zo berr war e loanigou. Gouzout a ra e tosta ar mare dont en tu-all. An Ao. person a zo deuet er mintinman hag hen deus graet gwella ma c'helle evit eeüna d'ezan e gontchou

gant ar Mestr bras... Met ar Pennher koz n'eo ket darbaret kement-se gant e finveziou diweza; e spered a zo troet muioc'h war-du e arc'hant; dastumet ha rastellet en deus epad bloaveziou, ha breman e vefe gwelloc'h gantan beza kignet eget diskregi eus eun dra bennak. Eun dra 'ra poan d'ezan; aon en deus e rankfe paea ker e arched. Lakaet en deus goulenn ar priz digant ar c'halvez.

Diouz ar pardaez, Katell, ar plac'h, a zeu er gambr. Daoust d'ar skleurenn a c'holo e zaoulagad, ar paour kêz koz a wel ar c'houlouenn o lugerni war ar c'hantolor keur; eur sell ankenius a daol war-du ar prenestr, evel pa damallfe anezi da zevi goulou hep ezomm.

Etre he daouarn e wel eun dra bennak gwenn.

« Petra zo ganez aze ? emezan.

— Lizer ar c'halvez, eme Gatell.

Lenn 'ta !

— ...eun arched koad-sapr a yelo d'eoc'h da 80 lur... 80 lur ! a c'hrozmolas ar Pennher. Alato e rabato ! 80 lur ! Eur rivin ! Kredabl e ra goap ac'hanoun ! An disterra koad am oa goulennet, ar falla koad ! — Selaou, Katell, warc'hoaz vintin ez i d'e gaout. Lavar d'ezan n'eus ket ezomm eus e arched, em eus unan aman prest.

— Aman ! E pelec'h ?

Ar bisoni he deus roet ijin d'ar Pennher koz. « Ya, emezan, sederet, aman ez eus unan. Er c'halataz... an orolaj koz..

— An orolaj koz ?

Ya ! an engrenaj ne dall netra ken. Met ar c'hoataj n'eo ket re brenvedet c'hoaz; gwella arched a c'hellfen da gaout !

— Alato ! Aotrou.

« N'eus alato ebet; pa lavaran d'it ! »

Hag e benn a gouez adarre war ar pleong, e valvennou leiz klozet, e vuzellou disliv. Eman moret. Bep an amzer e seblant mouz'hoarzin ouz ar 80 lur en deus espernet arok mervel... An arc'hant, an arc'hant milliget, a vezo eta betek ar poent diweza war spered an den-se krouet ha deuet war an douar evit servicha ha karet an Ao. Doue ?

Epad an noz e chom hanter-gousket. Da c'houlou deiz Katell a dosta e skouarn da selaou anezan o tenna e alan, hag ez a kuit.

Eun tammig sklerijenn a zeu dre ar prenestr. Ar Penner koz a wel ar goulou war an daol noz. Hag hen sevel war e ilin ha tostaat e benn. Astenn a ra e c'houzoug. C'hoaz ! c'hoaz !

Gant e huanad diweza e laz ar c'houlouenn.

DEVY.

Evit ar peoc'h enep ar brezel...

Daoust ha gouzout a rit ?

en deus ar Pab Léon XII, dre e guzuliou mat hag e aliou fur, laket fin d'an tabud savet

- e 1885, etre an Allemagn hag ar Spagn.
- e 1890, etre ar Portugal ha Bro-Saoz.
- e 1894, etre ar Venezuela hag ar Guyane.
- e 1995 etre ar Venezuela ha Bro-Saoz.

— e 1899, daoust da-se, an Tad Santel ar Pab n'eo ket bet pedet da lavaret e c'her e kenta kevredigez La Haye, a oa enni pennou-bras an holl vroioù bodet evit labourat da lakaat ar peoc'h etre an holl vroioù.

Hag e vezo c'hoaz kavet... azenned evit lavaret e klask an Iliz sevel brezellou.

D'an 19 a viz Even.

Gouel ar Galon Sakr



Hor Salver Jezuz-Krist e-unan en deus goulennet ma ve graet ar gouel-se.

D'ar 16 a viz Even 1675 en deus lavaret da Santez Mac'harit-Mari :

« Goulenn a ran diganez ma vo graet, d'ar Gwener kenta goude eiz-ved gouel ar Sakramant, eur gouel evit enori va C'halon ha distaol anezi dre eur gomunion ha dre bedennou c'houek eus an holl dismegansou a re-seo epad ma vez war an aoteriou. »

✠

Ar Gouel-se a zo eta savet evit rapari e kenver karantez Hor Salver a n'eo ket anavezet gant lod, a vez dizonjet gant lod all, dismeganset gant kalz dreist-holl e Sakramant an aoter.

« Prometi a ran d'it e tigo ro ledan va c'halon evit skuilh stank he c'hrasou war an dud a rento d'in an enor-se hag a labouro evit ma vo rentet d'in. »

✠

Aa Galon Sakr he deus prometet benniga an tiegeziou a vo enoret enno he skeudenn, lakaat ar peoc'h er familhou, unani ar re a zo disunanet, sikour ar re a vefe en eun ezomn bennak.

Prometet he deus d'ar re a vo konsakret d'ezi rei d'ezo an holl grasou o deus ezomm evit o stad, o skoaz-lla en ho labourioù, o frealzi en o foanioù, beza ganto epad o buhez a-bez ha dreist-holl da eur o maro.

✠

Greomp Gouel ar Galon Sakr d'ar gwener 19 a viz even.

Lavaromp d'ezi eus a greiz hor c'halon :

« Kalon Sakr Jezuz, ho pet truez ouzomp ! »

EUS PELEAC' HT' A ?

« Ar pezh a reot d'ar bihanna eus va re, d'in-me va unan eo her greot »



Nag eo reuzeudik an dud-se taget gant ar c'hrign-beo! Bep bloaz e varv anezo 3.600 en hor bro, 4000 e P ris hebken. Eno e kaver evito ospitaliou ha c'hoaz ne'z eus enno nemet 400 gwele evit digemeret ar re glanva.

Hag ar re all ? Ar re all, goude beza bet stlejet eus an eil ospital d'egile, bannet kuit a bep leac'h, zoken eus ti o zud, a gouez nebeut a nebeut en dizesper hag a echu o buhez en eur c'horn-tro bennak war eur gwele dem-hinvel ouz hini an den santel Job.

Ar paourkez tud-se, n'eus pare ebet evito, goloet ma z'int a c'houlou brein a rafe donjer da eur sant. Kavet o deus koulskoude eneo trugarezus d'o louzaoui ha da frealzi o rann-galon.

Piou'ta ?

N'eo ket avat merc'hed, bet edoug o buhez o redet war-lerc'h plijadurioù, hag o defe ezomm da ober pinijenn evit o skouerieù fall.

N'eo ket kennebeut tud lorc'hus a blij d'ezo ober sakrifisou kalet a bell da bell evit kaout tro da veza meulet.

N'eo ket kennebeut merc'hed koumanant d'ezo ha ne vez paet o labour nemet gant arc'hant.

An dud a ra wardro ar glanvourien-se a zo merc'hed a renk uhel, intanvezed, lavaret ganto kenavo da holl blijadurioù ar bed, hag o deus kinniget o holl amzer hag o holl nerz evit o nesa.

Ar merc'hed-se o deus savet ken-trezo « kevredigez Itronezed ar C'halvar ».

Er penn kenta e kavomp an Itron Granier, eur vaouez pinvidik eus Lyon kollet ganti, d'he zri bloaz war n'ugent, he fried hag he daou vugel.

Eun dervez e kavas en eur c'hoz tamn galatrez eur vaouez goloet a vreinadurez, a oa eun donjer sellet outi.

Kaout a reas d'ezhi e oa unan bennak maro ankounac'hast eno.

Nann, beo'oa ar baourez goz, hanvet Mari-Suilh-Devet, krignet he dremm gant eur c'hanser euzus, hag a vanve eno war an teil.

— 109 —

An Itron Granier a dennas he manegoù, a netaas ar c'horf brein hag e zougas d'an ospital.

Met eno, ne fellas gant den e zigemeret. Neuze, leun he c'halon a druz an itron pinvidik n'hellas ket miret da vriata ar baourez ha d'he starda war boull he c'halon.

Madam: Garnier he doa kavet he hent.

Gouestla'raio he buhez da ober war-dro an dud taget gant ar c'hrign-beo, pare ebet evito, war-dro ar re n'eus digemer ebet evito en ospitaliou, hag a vez dilezet zoken gant o familh.

Sevel a raio eun ti hag eno an dud paoura, ar dud donjerusa eo o dezo ar muia gwir da veza digemeret.

Hirio, kevredigez Itronezed ar C'halvar he deuz ziz ti evit digemeret an dud klanv.

Eun den a renk uhel, hag a zo bet aotreet da ober eur bale en unan anezo, a skrive kement-man :

« Digemeret oun bet gant an Itron Renerez, gwisket penn-dabenn e du, evel an daouzeg itron all dalc'hmata en he c'hichen evit he zikour. N'o deus ken braoig nemet eur grusif koad en o c'herc'henn.

« 27 maouez all, intanvezed hi ivez, hag a vev er bed gant o familh, a zeu bemdez d'o sikour da ober war-dro ar re glanv.

« Bemdez d'an hevelep eur e vez louzaouet ar gouliou.

« Gwisket breman e gwenn, ez eont, da heul o Superiozez, er gampr vras. Holl e kouezont d'an daoulin, o fenn soublet, e keit ma ra ar Superiozez ar bedenn-man, a vouez uhel :

« Ni a ginnig d'eoc'h, Aotrou Doue, al labour emaoomp o vont da ober war-dro ar re glanv. Roit d'ezo nerz-kalon ha d'eomp-ni feiz ha karanaz ».

Pep hini a ya neuze da gaout he c'hlanvourien, ha, daoust d'ar penecher da veza digor bras, an aer a zhu buan da veza flerius.

Ar maro a zeu alvez da ober e dro, rak n'eus pare ebet evit an dud keiz-se, klanv bras holl.

« O gwelet am eus war o gwele, kempennet brao evel bugañ, o d'emm leun a beoc'h, a habaskded; lavaret e vije e vezent eürus. »

Eus peleac'h e teu kement-se a nerz-kalon, koulz d'ar re glanv eget d'an dud vat a zilez kar, mignon ha pep plijadur evit dont da louzaoui gouliou brein tud n'anavezont ket, da frealzi o enkreiz gant kalon eur vamm hag aked eun ael ?

Eus peleac'h ? Met eus kalon an Doue stag ouz ar groaz en deus lavaret : « En em garit an eil egile evel m'am eus o karet me da genta ».

JOBIG.

“LAUDA SION”

e brehoneg, war an ton latin

- 1 Kristenien, meulit ho Salver,
Ho Roue, ho Pastor tener,
Dre ganaouennou seder.
- 2 Grit kement a c'hellit ober,
Hag atao c'houi a jom berr
D'eo veuli 'giz ma tleer.
- 3 Da veuli gant gwir garantez
Bara beo, hag a ro buhez,
Ema hirio an devez.
- 4 Ar Bara grêt er goan santel
Ha lodennet d'an ebstel
Gant Jezuz a-raok mervel.
- 5 Ra vo flour ha krevn ho moueziou,
Embannit, dre ho kantigou,
Levenez ho kalonou.
- 6 Rak ar gouel-man, ganeomp hirio lidet,
'Ra d'eomp sonjal en deiz m'eo bet fardet
Ar Bara muia karet.
- 7 Ar Pask koz a zo dilezet,
Hag ez eus, war daol ar banked,
Eur Pask nevez d'eomp aozet.
- 8 Breman nevez a drec'h koz,
Ar wirionez 'zo diskloz,
Hag an deiz a skub an noz.
- 9 War urz Jezuz e tle breman
An Iliz ober eveltan,
Da zerc'hel sonj anezan.
- 10 Hervez omp bet gantan desket,
Bara, gwin a vez konsakret
D'ober d'eomp beza salvet.
- 11 Ar bara, — ni a gred nerzus, —
A zeu da veza Korf Jezuz,
Hag ar gwin e wad strujus.

- 12 Ar pezh n'heller touch na gwelet
Gant feiz gwirion a vez kredet,
Enepe urz an traou krouet.
- 13 Dindan spesou ken dishenvel,
Ha n'int nemet skeudou santel,
E chom kuzet traou uhel.



- 14 Ar c'horf 'zo meuz, evaj ar gwad,
Met, gant pep spes keit ha ma pad,
Jezuz holl a jom dalc'hmat.
- 15 N'eo na torret na bruzunet,
Met a bez e vez resevet,
Pa vezer komuniet.

- 16 Unan pe vil e resevo,
Kement ha kement o devo :
Jezuz en e bez ato.
- 17 Mat ha fall e zigemero,
Met kemm bras a vo etrezo :
Kemm a vuhez pe 'varo.
- 18 D'ar re vat e ro ar vuhez,
D'ar re fall maro didruez :
Pebez kemm n'eo ket hennez !
- 19 Pa vez rannet ar Sakramant,
Kredit start, hag hep nec'hamant,
E ro d'eoc'h eun tammig osti
Kement hag eur mell hini.
- 20 Korf Mab Doue n'eo ket roget,
Ar spes hepken a zo torret ;
Ha Korf Jezuz a jom servat
En e vent hag en e stad.
- 21 Setu deut Bara an Elez
Da veza hor magadurez,
Gwir vara bugale ar c'hvas :
Arabat e rei d'ar chas.
- 22 Gwechall-goz eo bet skeudennet
Dre Isag d'ar maro renet,
Dre an Oan debret d'ar Paskou,
Dre ar Man roet d'hon Tadou.
- 23 Pastor tener, pred ar vuhez,
Ho pet, Jezuz, ouzomp truez :
Deut d'hor maga, deut d'hon difenn ;
Grit ma savimp d'ar vro 'laouen
Da veva da virviken.
- 24 C'houi holl-c'hoziziek, holl-c'halloudek,
Hor mag aman, ni douarek,
Grit ma vezimp holl azezet
Gant ar Sent ouz taol ho panked,
Er baradoz benniget !

BASTIEN.

Mision Penhars

(19 a viz meur — 5 a viz ebrel)



Ar wazed o tougen ar C'hrist bras.



Ar « glaziged » war loan, o tigiñ hent d'ar prosesion.

Evit beza salvet eo ret anaout ha kredi

Mister an Eternite

ER BARADOZ, AN HOLL EN EM ANAVEZO ETREZO.

Anaout a raimp ar re hon iodo anavezet war an douar. Klevout a raer meur a wech lod o lavarout : « En nenv n'en em anavezimp ket etrezomp; rak eno e vezimp ken beuzet e Doue ma ne gavimp mui an tu da sonjal e traou all. En aviel zoken e weler an dra-se : Er Baradoz, eme Jezuz, ne vo mui a briejou, na gwaz na maouez. »

Fazia a reont kalz an dud-se.

✱

Da genta sklêr eo komzou Hor Salver evit ar re a anavez an Aviel. — Ar Farizianed, dalc'himat o klask heskinat Jezuz a c'houlen outan eun deiz : « Lavarit d'eomp'ta : piou, er Baradoz, a vo gwir goaz d'eur vaouez a vo bet dimezet seiz gwech war an douar ? » — « Er Baradoz, a respont Jezuz, ne vo mui a zimezi ete an dud : holl e vez int evel Elez. » Da lavaret eo : an doare ma vevo ar priejou er Baradoz a zo dishenvel diouz an hini ma vever war an douar, ha dishenvel ive ar garantez a vo etrezo, rak kalz uheloc'h ha kalz brasoc'h e vo.

✱

M'en em anavezont ket etrezo, ar re a zo er Baradoz, perak neuze renta d'ar Sent kement a enoriou war an douar ? ...Ha perak kemerout kement a boan evit kempen kaer bez hon tud varo ?...

Perak ?... Gwir eo ne varvo ket an ene; rak emañp o c'hortoz kaout ha gwelout en-dro ar re hon eus kollet. Gwir eo eta ive ne varvo ket kennebeut ar garantez a ziskouezomp d'ezo en eur gempenn o bez... hag e vevo c'hoaz ar garantez-se er baradoz. Sklêr eo eta ec'h en em anavezimp etrezomp; rak ne c'heller ket karet hep anaout.

✱

Alies a wech en deus lavaret Jezuz, en Aviel, ec'h en em anavezo ar Sent etrezo er bed all.

— *En Nenv, eme Jezuz, eun deiz, d'e ebestel, c'houi a vezo azezet war daouzek trôn evit barn bugale Israel.* »

Ha c'houi a gred ne anavezo ket an Ebestel ar re o dezo da varn ?... ha ne vezint ket o unan anavezet gant ar re a vo barnet ?

Er pred diweza a reas Jezuz gant e ebestel araok mervel, e lavaras d'ezo : « *Kemerit; evit ha debrit; e gwirionez m'hel lavar d'eo'h ne gemarin mui eus an drê man betek an deiz ma kemerin adarre an dra se ganoc'h e rouantelezh va zad* »... gerioù doue ha

souezus. Jezuz en em gavo eta adarre eun deiz ouz taol gant e cbestel e ti e Dad, evit prejou misterius an Eternite ?

Hag azezet eus ar memez taol, n'en em anavesent ket etrezo, Jezuz hag e cbestel, deuet da veza diavezidi an eil e kenver egile ?... Na pegen trist e vefe eur pred eus ar saurt-se !...

**

Ma n'en em anavesent ket etrezo tud ar bed all, m'her goulenn ouzoc'h, petra e vefe ar Baradoz ? Neuze'ta Jezuz ne anavesse ket eno e vamm Santel ar Werc'hez Vari; Santez Monika en em gavfe e kichen he mab sant Aogustin hep e anaout; eun tad hag eur vamm en em gavfe er memez lec'h gant o bugale hep kaout tamm anaoudegez anezo na tamm karantez-evito ?...

Me, laoskomp ar sorc'hennou-se savet gant tud diaviz ha kredomp an Iliz pa lavar d'eomp e Meomp pedi ar Sent, rak i hor gwel : n'int ket eta ken kollet, ker buzet e Doue ma ne c'hellont ket sonjal e traou all. An Iliz a lavar d'eomp c'hoaz beva mat war an douar evit m'hon do al levenez da veza eun deiz gant ar Sent.

Daoust ha kaout eürusted a c'heller o veva gant tud n'anavezet ket ?...

E oferenn goulenn an Holl Sent ema ar bedenn man : « Grit, o va Doue, m'o gwelimp eun deiz an holl Sent. » En oferenn a c'hell ar balleg lavarout evit : dad hag e vamm eman ar geriou kaer-man : « Pardonit d'ezo o fec'hejou, o va Doue, ha grit d'in en em gaout eun deiz d'o gwelout er baradoz ». En oferenn an Eured e kaver ivez ar geriou-man : « Grit, o Doue holl c'halloudek, d'an daou bried man... beva pell amzer war an douar; mont eun deiz d'ar Baradoz hag eno en em garout alao da virviken. »

Mat, daoust hag en em welout a c'heller gant plijadur, hag en em garout hep en em anaout ?...


Sklêr eo eta ar wirionez man : Er Baradoz ec'h anavezimp holl ar re hon dezo anavezet war an douar.

MELEGAN.

Tud vat Sant Thurien...

a gavo er Vuhez Kristen, er miz a zeu, poltrejou mision o farrez.

Hounnez oa e groaz



A hed an hent meinek, dindan an heol bero, eur perc'hirin a gerze, war e gein kroaz e vuhez.

— Gwall bounner eo ar groaz am eus bet digant Doue. Gouzout a ran, holl hor beus da zougenn hor c'hroaz evit en em gaout en Nenv. Evelato houman am flastro. Va Doue, n'helfec'h ket skanvaat va bec'h ?...

Raktal e krogas ennan ar c'houket hag e kreiz eur sklerijenn gaer e welas Jezuz, a lavaras d'ezan gant eur vouez leun a vadelez :

« C'hoant e pije da gaout eur groaz all e lec'h da hini ? »

— Oh ya, Aotrou. Paour oun, koz, n'oun ket evit mont mui. Setu aze 60 vloaz abaoe ma tougan ar groaz-se, a garan evelato, o veza ma teu diganeoc'h, met...

— Deus ganen, va mab.

Hag ez eas en eur c'heo bras mantrus. An Aotrou a lavaras d'ezan. « Aze eman dastumet an holl groaziou a dle, dre vadelez Doue, digeri d'an dud dor ar Baradoz. Lez da groaz aze war an treuzou ha kemer an hini a blijo ar muia d'it. »

Ar perc'hirin a yeas er c'heo. Souezet e voe hag evel spontet o welet kement a groaziou bet douget abaoe penn kenta ar bed hag a dle beza douget beteg ar fin. Pell amzer e sellas outo. Kregi a rae enno da welet o fouez, hag o leze da goueza. Bez e oa eno kroaz ar warizi, kroaz ar morc'hed, kroaziou an holl glenvejou a sko an dud war an douar, kroaz an dismegans, kroaz an drouk-prezegerez, kroaz an dizunvaniez ha pep seurd kroaziou all.

— Nann, emezan, n'eo ket hounnez eo. Pehini da gemeret ?

— Hep kroaz war an douar n'eus ket a gurunenn en Nenv, a lavaras Jezuz.

Ar perc'hirin a zeu war e giz, a sell e pep tu, hag o veza m'eo nec'het ha tost da fall-galoni, e klev mouez Jezuz o lavaret d'ezan : « *Sell a-hont !* »

Hag e wel war an treuzou eur groaz a blij d'ezan. He dibrada a ra, hag e lavar, laouen : « *Kaout a ra d'in e c'hellin dougenn hounnez. Pounner awalc'h eo. Met n'eo netra e kichen ar re all. Hag he c'hemeret a c'hellan, Aotrou ?* »

— *Kemer anezi, eme Jezuz, hag he doug betek penn.*

Astenn a ra e zaouarn da gregi enni, hag o sellet mat e wel eo e groaz koz a zo adarre dirazan... N'en em glemmo mui, rak n'em'an ket e-unan o c'houzanv war an douar, re all o deus pounneroc'h samm egetan.

PER.

Er Beljik.

An Tad Damien

D'an 3 a viz mae diweza ar Roue Leopold III a zo deuet da Anvers evit reseo korf unan eus brasa bugale ar Beljik, an Tad Damien.

An Tad Damien a za eur misioner, marvet d'e 49 vloaz, en eun enezenn kollet e kreiz ar Pasifik.

Eno e vevas epad 16 bloaz oc'h ober wardro an dud paour harluet eno eus pep bro, abalamour m'edont taget gant eur c'hlenved euzus ha n'eus pare ebet evitan, al lorgnez.

Daouzek vloaz goude m'en em gavas e mesk ar paourkez tud-se, an Tad Damien a voe d'ez dro taget gant al lorgnez.

Ne ehanas ket evit-se da entent ouz ar re all hep sonjal tamm ebet ennan e-unan. Pevar bloaz e vevas evel-se, lor e-touez an dud lor.

Pemp dervez hepken araok mervel e chomas war e wele, ha laouen evel eun ael e rentas e ene kaer da Zoue.

Korf an Tad Damien a zo dizroet d'e vro, hag ar Beljik he deus graet d'ezan eun digemer kaeroc'h eget an hini e vez graet d'eur roue.

Hag er baradoz 'ta neuze, peseunt digemer n'eus ket bet graet da ene ar misioner santel, gant an aelez hag ar sent.

Marivon Fri-furch

Hir ha moan eo he fri evel hini eur gaerel.

N'eo ket evelato abalamour da-se eo bet hanvet Fri-furch. Kaout a c'heller eur fri moan ha begok, hep beza evit-se eur fri-furch.

Met Marivon he deus eur fri begok hag a zo ouspenn eur fri-furch.

Eur fri-furch, eur fri kurius, eur Vari beg-araok, evel ma vez lavaret e broiou-zo.

**

O chom eman Marivon en eur barrezig war ar maez. Eno eo aes furchal; ha Marivon a furch ouspenn tregont vloaz a zo. N'ouzoun ket penaos n'eo ket deuet he hri da dougna o furchal kement-se.

Met nann, chom a ra atao ganti he fri minouch.

**

Marivon a oar Petra 'za a-nevez e kement ti a zo eur barrez; e ti Per al Laou, ar c'hlasker truilhou, koulz hag e ti an Aotrou Mear pe an Aotrou Person.

Gouzout a ra piou a za bet hirio o leina er presbital... Aotrou Person Lannweskle n'en deus ket gellet dont, dalc'het m'eo bet er gear da ober eun interamant vras.

E ti Lom ar C'hakous eo aet ar yer gant al louarn en noz tremenet... Job ar C'hidour a za aet hirio d'ar foar gant eun torrad moc'h bihan... Brigitte, merc'h ar C'hemener, a zo bet gwelet, dec'h dioc'h ar pardaez, o pourmen « brassibrassou » gant eur paotr yaouank... Poent awalc'h eo d'ez dimezi ar penn-skanv-se, eme Varivon en eur flipadenn... E ti Yann ar Pennglaouig eo bet adarre ar medesin. Ar pennglaouigou bihan-se a vez digaset ar medesin d'o c'haout evit an disterra tra... pa c'hoarvez ganto lakeat o botez e gil... Tud paour war o meno ! Ma n'eo ket eur vez!!

*
**

Met penaos e oar Marivon Fri-furch kement aiñ a draou?

Setan aman. Selaouit mat !

Marivon he deus, war bord an hent, tost d'an iliz, eun tammig ti bihan, warnan eur prenestr bihan; war ar prenestr ez eus eur ridoch, bet gwenn gwechall. Melen beuz eo hirio. Fri-butun Marivon (rak ouspenn eur fri-furch Marivon a zo c'hoaz eur fri butun) a zo bet ken alies o ti-vera outan... Eun tammig trouz war an hent, ha setu fri Marivon ouz ar prenestr...

An Aotrou Person eo a dremen. Da belec'h eta eman o vont ? N'eman ket o vont da welet eun den klanv, peogwir n'eman ket e zac'h du gantan...

Araok an noz Marivon a ouezo e pelec'h e vezo bet. Mont a raio d'ar « bureau » da brena 10 gwennegad butun; da di Seza Koefraklik da brena eur pakadig chikore.

Goudeze ez ay da gerc'hat dour. War he hent c kavo eur verc'hig bennag o tont eus ar skol. Ne vo ket pell evit beza diennet gant Marivon.


War zigarez goulenn labour pe kas d'ar gear labour c'hraet, (rak eun hanter-kemenerez bennak eo ivez Marivon) ez ay eus an eil ti d'egile, o konta da Vac'harit ar pezh he devo klevet ha gwelet e ti Varjan...

Gant he fri-furch hag he fri-butun e ia hag e teu en eur strakellat, oc'h embann keleier gwir, keleier hanter-wir ha zoken keleier ne vez netra wir anezo.

Ha pa sonjan e ranko eun deiz Marivon renta kont da Zoue eus he holl c'homzou goulo, em eus truez outi hag eo gwelloc'h ganen lezel ganti he fri-furch ha derc'hel ganen va hini « tougn ».

PETROMIK.

Istor
hep komzou
Chilgamik
ha
paotr ar muzik



Selaouit
mat . . .



ha n'hen
an-
kounac'hait
ket.

ER BLOAZ-MAN,

Pirc'hirinaj Trede-Urz
S. Fransez e Santez-Anna
Wened

A VEZO

D'AR SADORN 19 HA D'AR SUL 20

A VIZ GOUERE.

URZ AR PIRCHIRINAJ A VEZO LAKET

AMAN ER MIZ A ZEÜ.

